

28  
L'An Art. Jaffrenou  
et l'esteni a g'enreuias  
na 3.

P. Jaffrenou  
Brignou

AL LETRIN BEO.

Non recito cuiquam, nisi amicis, idque rogatus ;  
Non ubivis, coramve quibuslibet.

(HORACE, L. I, Sat. IV, v. 73. )





AR CANBRIEN ILLA BRAD GANTI (p. 2)

ÉPITRE HUMORISTIQUE

A M. l'Abbé X... *Vic. gen.*

—  
« Ne quid nimis. »

N'allez pas vous récrier  
Sur ce tout petit ouvrage (\*)  
Simple et plaisant badinage  
Écho du siècle dernier ; (\*\*)  
Veuillez plutôt m'excuser  
D'oser vous en faire hommage.  
Mon but est de cultiver  
Notre celtique langage,  
Que d'aucuns veulent traiter  
(Ah ! contr'eux combien j'enrage ! )  
Comme un jargon étranger,  
Comme un pur baragouinage !  
Je voudrais, surtout, montrer  
Qu'il n'est ni lourd, ni sauvage,  
Ni trivial et grossier,  
Ainsi qu'on l'ose avancer.

—  
Eh ! puis-je, en cet ermitage,  
D'ailleurs charmant paysage,  
Quand l'ennui vient m'assiéger

---

(\*) Imitation en Breton du Lutrin-  
Vivant de Gresset.

(\*\*) Gresset mourut en 1777.

Avec son pesant bagage,  
Ou le spleen m'aborder  
Dans son lugubre équipage,  
Pour écarter tout nuage  
Tout noir et triste penser,  
Par ce sombre temps d'orage  
Où tout semble chanceler,  
Et sur le point de sombrer  
Dans un immense naufrage ;  
Au lieu de politiquer,  
(Aujourd'hui c'est une rage ! )  
D'oûir l'éternel bavardage  
De tel ou tel gazetier  
Sur le fameux chancelier, (\*)  
Sur l'universel suffrage,  
Sur le monde financier  
Et sur l'affreux tripotage  
Si propre à vous écœurer  
De ces charlatans à gage  
De haut et de bas lignage  
Qu'on tient à nous dévoiler  
Avec un grand étalage  
De phrases sur le papier  
Dont l'Auteur se fait payer  
A tant la ligne et la page,  
Puis-je.... ah ! faut-il demander !  
Mieux faire que d'employer,

---

(\*) Bismarck.

Sans craindre nul comméragé,  
Ni blâme d'aréopage,  
Quelques instants à conter  
En breton, et à rimer  
Des histoires d'un autre âge ?

—  
Or donc, pour m'innocenter  
D'avoir osé translater  
Cette scène de village  
Dans notre antique parler,  
Sans calque et sans esclavage,  
Et prenant soin de laisser  
Ou d'émonder tout passage  
Dont la pensée ou l'image  
Aurait pu scandaliser,  
Ne puis trouver davantage  
De raisons à vous donner  
Hormis ce tant vieil adâge  
Qu'il me convient d'alléguer :  
« S'il faut toujours être sage,  
« Il faut l'être sans oultré. »  
Mais trêve de verbiage !  
J'ai l'honneur et l'avantage,  
Sur ce, de vous saluer,  
Et votre aimable entourage  
Que je suis loin d'oublier.

**AVIZ.**

**Al Levrik-má' so bet skrivet  
Evit tud ledan a speret :  
Och ar re all e tifennan  
Lenn, na silaou lenn anezan.**

---

## AL LETRIN BEO .

—  
Paolik, an diaoul pe Satan  
A boaign, a labour, eb ehan,  
O clask ober drouk a brezel  
D'an traou mad a d'an dud santel .  
Pa hell trompla an dud devot ,  
E c'hounid essoc'h ar re zot .  
Var gement-se, ag evit skuer,  
Silaout eun historig vër .

—  
Guechall e voa en eur barrez,  
N'oun dare cals e pe gostez,  
Credabl e tu menez Aret,  
Ar menez-se kement brudet ;  
Lakeomp e Plouneour-Menez,  
Pe, m'ar cavit guell, er Fouillez ;  
Dre eno, var a leverer,  
E teuas ar mab prodig d'ar ger.  
Gouzout a rit e pe seurt stad  
E tistroaz da di e dad :  
En eur stad meurbed truezuz,  
Drebet e gorf gant an astuz,  
Er c'hos tam tok toull var e benn,  
E dreid dilerou, diarchenn ;  
En dro dezan nemet truillou,  
Var e vizaj liou an ankou.

Mez n'eo ket eus ar mab prodig  
E z'eus menek em historig :  
Distrei a ran dezi gant prez ;  
Silaouit mad, taolit evez.

—

Bez ' e voa , eta , eur vaouez,  
Eur vaouez goz anvet Jeanton,  
Brudet estreget er c'hanton,  
Dreist oll dre an aliou mad  
A roe d'an dud a bep oad.  
Etal ti an Autrou Person,  
En er c'hos tam lochennik plouz,  
E veve sioulik a didrouz.

—

Jeanton voa bet , en e amzer,  
Ar goanta plac'h eus e c'harter ;  
A ma vije bet fortuniet  
Pinvidig , morfad, vije bet.  
Choazet e deus stad ar guerch'ded  
'Vit servicha Doue bepred,  
A labourat liproch a ze  
Da zilvidigez e ene.

—

Abaoue e c'henta iaouankiz  
Jeanton a gempen an iliz ;  
Eus pep tra er zekreteri  
I eo e deus an oll zourci.  
Meur a berson , meur a gure



'Zo het er barrez abaoue.  
Beteg teir gueic'h, en e amzer,  
E z'eo bet chenc'het ar c'hloc'her.  
Setu perak brema Jeanton  
Var an oll e deus levezon ;  
Ag e daou gonseil ar barrez  
E ve silaouet e moüez.  
Beteg, soken, al lampounet  
A zoug dezi doujans, respet.

---

Oc'hpen-ze, Jeanton a zo paour,  
Mez bez'e deus eur galon aour.  
Savet e deus ar paotr Guillou,  
Ar responder offerennou ;  
Ar paotric keas, var an douar,  
N'en doa na tad, na mam, na kar.

---

Character mad, eun tamic skan,  
Speret ne vanke ket dezan.  
Mez n'oa ket krën var an deski ;  
Re droet'voa gant ar c'hoari :  
C'hoari galoc'h, canetennou,  
Orel, patati, a killou.  
Aliez, gant e vignoun Saik,  
Er guelet o c'hoari riklaik.

---

Ogen o c'hoari, eun devez,

E frotas kement e vragez  
Oc'h an douar ag oc'h ar vein,  
Ma voue per uzet traon e gein ;  
Me lavar traon kein e vragou,  
A voa var 'nez mont e pillou.  
Guelet a reat, o sellet tost,  
En doa, dija, lizer er post.

---

Guillou ne reas ket a vâñ,  
Mez an toull a grescas buan.  
A ben ar fin tout ar blassen  
A zigoras d'ar sklerijen,  
Evel ma tigor eur c'hastel  
E doriou d'an dud a vrezel,  
Pe gentoc'h eur gear gabital  
Dismantret gant eur general.

---

Paolik, credabl', en doa ive,  
Lakeat e bao el labour-ze :  
An aneval 'so aneza  
Ne vank morse pa bell pega.  
Anfin, e gis ma leverer,  
Eun dra chreat n'eo ket da ober :  
Great' voa an taol : bragez Guillou  
N'edo, mui ken nemet truillou.  
Ag en d'ar gear, ar reuzeudig,  
Mezok evel ar Mab prodig.

Setu neuze Jeanton nechet,  
Rag paour e voa 'vel ar razet  
A vez, dre an ilizou coz,  
O erignat goulou, hed an noz.  
Ia Jeanton a voa ankeniet :  
Kaer e doa clask, ne gave ket  
Tam lien, tam mezer ebet.

---

Sellet a ra o'ch ar bugel :  
Guelet a ra, gant an avel,  
O vont, o tont eun anseign guenn  
Flip-flap en dro d'e blaneden.  
Ag e krosmole Jeanton gez,  
Assa ! ma ne ket eun druez !  
Ret voue da Villou choum en ti  
Azez et eb galloud c'hoari !

---

Egis 'meus clevet lavaret,  
Eun droug e unan ne deu ket :  
Ar pezh a greske nec'h Jeanton  
Tostaat a rea deiz ar Pardon.  
Petra eta, penaos ober ?  
Eno e ma e oll freder  
Ken diez edo e spered  
Ma na zrebaz netra de fred.

---

Setu Paolik, ret e ma ve,

Ag o tostaat outi neuze.  
Ep mar en eo a ziscuezaz  
Da Jeanton eur picol leor braz  
Great oll gant c'hec'hin denved  
A voa en eur chorn astennet.

---

Varnan e velet barennou,  
Pikou du a lizerennou.  
Siousas ! Jeanton ne vouie ket  
Edo leor-cân an offern bret.  
D'a mare-ze, Jeanton a voa  
O rën e fevar ugent vloa :  
N'edo ket ker sklear e guelet  
Evel m'e voa de zeitec'vet.

---

A setu Satan o choueza  
En e scouarn ar chomzou mâ :  
« Lavar d'in-me piou a vouezo  
« Es po eus eul leor ken teo  
« Distaget diou pe deir feuillen ?  
« Cred ac'hanon, ne vouezo dèn,  
« Nann den ne vouezo birviken.  
« Dal, setu aze da affer,  
« Troch, troch buan, a kea d'ar ger. »  
Ag en o cass eün dorn Jeanton  
Crak var ofis caër ar Pardon.  
A Jeanton, touellet siousas !

Peder feuillen hir a drouchas,  
A ganto, ep scorpul ebet,  
Del ma z'eo er ger digouezet  
Planeden Guillou zo cuzet.

---

Ag en oa drôl ar paotr bian  
Tacounet, goloet a gân !  
Anfin abriet voa atao  
Ous an avel ag ous ar glao.  
N'eus droug ebet e paourentez  
Ag eun dra gaër eo propentez.

---

Gouscoude deuet an deiz caër,  
Deiz ar Pardon, gouel bras sant Pèr :  
Ar Mest caner a glask buan  
Ofis ar Patron el leor-cân.  
Mes caër en deus trei a distrei  
Ar feuillennou a zeo, a glei,  
Ne ket evit caout an ofiz :  
-«Sûr, emeza, eur raz iliz  
«En deus drebet ofiz ar zant !»  
Ag en nechet braz : Etretant  
Setu e laosk e zaoulagad  
Da goueza var ar chamarad,  
A gouelet an ofiz a-bez  
A digor frank var e vragez.

---

Neuze 'savaz eun drouz iskiz  
Ken a dregernas an iliz ;  
Ag an oll da zabaturi  
Dirak eun evelep choari.

---

D'an Autrou Person voue kasset  
An dra evit beza barnet.  
An daou gonseil a assambler,  
Ar Mestr-skol ag an Autrou Mer.  
A setu an oll voue aviz  
Araok tredezon an ofiz  
Sevel Guillou var al letrin  
A cana, neuze, och e gein.

---

Ar pez voa laret a voa gret :  
Setu ar paotr Guillou savet.  
A blad var e gôv er laker  
Eleach al leor, var gein an Er,  
A blav a zioch ar pillier .  
« Choum trankil a zo ret breman , »  
A lavarer neuze dezan .  
« Divoual da goms e mod ebet ;  
« Dalch ato da zaouarn croachet .  
« Arabat lënva na choarzin :  
« Dreist oll dalch stign an taboulin :  
« Arabat sellet en dro d'id  
« Na piou a deu na piou ia kuid . »

Ar ganerien iea brao ganti :  
Gant o lunedou var o fri  
E lennent ep cals mui a boan ;  
Var eur seurt nevez mod leor-cân.  
Al leor eur veac'h 'reaz eun trouzik ;  
Alato an oll'joumaz sioulik.  
(Fall eo beza re gisidik,)  
Pennou scanv netra ken a rê  
Sellou corn, ag a vuschoarze  
O trei an eil oc'h egile

---

Eun dra sûr eo, e peb seurt giz  
E za an diaoul d'an iliz,  
Evit distrei ar gristenien  
Pa vennont ober o feden.  
En dro mâ'za d'an offeren  
A zindan furm eur vespeden.  
Gournijal'ra, froumal, anfin  
E choum a za var al letrin,  
Me lavar al letrin nevez.

---

Den outan ne daolaz evez.  
Ractal e cav tro da dremen  
Etre ar chig ag al lien.  
A setu en gant e virou  
O flêma e ler da Villou.

An amprefan leun a valis  
A red e leac'h ma cav frankis.

---

Eun tachad mad, ar c'heaz paotrik  
A chouzanv, ep lavaret grik.  
Arrajet neat gant an drebon,  
E choum ep finval var e drôn :  
E choad a verv, d'e benn e sao,  
Ag ar paour keaz a zalc'h atao :  
Anfin setu en eun taol crenn  
Ag en ober lamm chouk-a-benn,  
En eur leuskel eur scrijaden,  
Ag evel eun den possessed  
E pik-lamm a dreuz ag a hed,  
Ag e scrabe, e scrabe ter  
Gant e ziou zorn e zivesker.

---

Ag en prout er meaz da denna  
Ar feuillen daonet : poent e voa !  
Croc'hen ar paotr a voa laosket  
Eleac'h m'en doa 'lon tremenet ;  
Ag epad eise goude-ze  
E renkas choum var e vele.  
Anfin dre eur gest er barrez  
Voue prenet dezan eur bragez.



**REFLEXION :**

Abars achui eur gerik :  
Guelit ama malis Paolik :  
Dre e ardou diabolik,  
Den n'en doa bet offeren  
O sonjal er gos vespeden.  
Ogen Satan, avad, a reaz  
En devez-se eur gounid braz.  
Diouallit, epad ho puez,  
Da goueza 'tre skilfou ennez ;  
Rag ne ket choant a vank dezan  
D'ho samma, a d'ho cass gantan.

**FIN.**



**BOMMOU FLÊMUS HA RE ALL.**  
(ÉPIGRAMMES imitées de MARTIAL.)

---

DA EUN DRA BENAC DROUK a ZO MAD.

---

« Si memini ... » etc. Liv. I 20.

Ma'meus sounj pevar dant ganeoc'h a ioa choumet :  
Daou gant eur reuchad paz er vann 'so bet strinket,

A dizale gant an daou all

E tigouezaz kement all.

Ar goaleur se a dleit da eun eil reuchad paz ;

Mez, credit achanon, a ze ne doch ket goaz,

Rag an taol-ze, Jeannet, a ro deoc'h peb frankiz

Da bassât pa gerrot, ag ervez ho tiviz,

Eleach bete bremâ ne gredec'h ket passât

Nemet en eur grëna, a pa vije red-mad.

Pa vo red, passât, soken pa ne vo ket,

Eun trede reuchad paz ne rai deoch drouk ebet.

---

Da va MIGNON DOM LAN.

---

« Dimidium donare Lino » etc. L. I 77

Coll evit gounid.

Lan a na rent morse netra

Am fed, dre gomzou ar chaera,

Da bresta dezan ugent scoet.

Presta ? 'moun-me : tra l ne ran ket,

Rag da anaout a ran re vad :  
Rei a rin d'id dek scoet avad ;  
Rei... ne ket presta ... evelse,  
Te 'c'hounezo , a me ive.  
Rag, cleo, pa vez menek da goll,  
Guell ganen anter éget oll.

---

#### AR MEDICIN PENNOC.

---

«Nuper erat ...» etc. I Liv. 48.

---

Ian Jostrom, guechall Medicin,  
Ne gave mui den, an orin,  
Sod avoualach da laeat e vuez  
Etre daouarn eun evelep lakez.  
Anvet e voa gant an oll : Al Lazer ;  
A setu en dilezel ar vicher.  
Mez evel al Louarn, va den,  
A rank mervel en e groc'hen ;  
Clanv pe varo e gliantet  
Diountañ n'hellont ket tec'het,  
Rag evit caout atao en e zaouarn  
Corfou an dud, petra'ra hon louarn ?  
En em ober a ra touller heziou !  
Choum a ra 'ta mevel gant an ankou ;  
Planta'ra hepret  
Fors tud er veret.

---

### VA BARVIER.

Laou an trocher baro  
A labour ken dillo  
Ken prim a ken buan,  
Pa droch diouz eur chostez  
Va baro, aliez  
En tu all a zivoan.

---

### D'AN AUTROU MOUCHETTE.

Ac a ganfarted er gear-mà  
Autrou Mouchette, eb ho counta !  
— « Petra leverez ? bouet ar grouk !  
M'ar da va dourn-me var da chouk,  
E tremeno d'id c'hoant farsall.  
— Mad coms a rin en eur mod all :  
Ouzin paouezit da gaout drouk,  
Pa baouezan d'ho kaketal,  
Diroufennit, eta, ho tal :  
Ac a ganfarted er gear-mà,  
Autrou Mouchette, oc'h ho counta !

---

### VAR EUR BEZ.

Er bez-màn eo bet antèret  
Eur paour kez den a n'en deus ket  
Rentet da Zoue e speret :  
— Penaos-ta ? — N'en doa tam ebet !

---

## DIVARBEN BEZA EVRUS.

---

Rouane a paotret denved  
An oll a glask an evrusted :  
Cals ne dizont ket anezi  
Rag n'er chlaskont ket en e zy :  
Evrusted ar re foll eo plijadur  
Evrusted eo plijadur ar re fur.

---

Trois mille ans ont passé etc.

---

Tri mil bloaz'so tremenet var bez Homèr an dall,  
Ag abaoue tri mil bloaz, ar barz coz ken brudet,  
En Europ ag er broiou all,  
A zo choaz iaouank-flam e chloar ag e c'henet !

---

«REQUIESCANT IN PACE ! »

---

N'oun ket coz, a gouscoude,  
Piou a ra van ouzin-me ?  
Den ... en dro din pa sellan,  
O clask ar re a garan  
Etouez ar re eus va oad,  
An daëlou em daoulagad,  
Oc'h ar veret e troan !